

## KANAOUEN

*Zavet enn enor ann Otro PINSIN, person kanton  
aboe hanter kant vloaz; ha kanet ouz tól, e  
Boulfriak, dirag ann Otro 'nn Eskop,  
goude ann Offeren hanter kant vloaz.*

---

War don: **Salud d'hec'h, Iliz ma farroz;  
pe : O Kalon Zakr.**

### *Diskan.*

'Vel bugale, enn dro d'ho zad,  
Gand ar joa hirie 'verv hon gwad!  
Meulomp eta a greiz kalon  
Tad koz ar Bersoned kanton !

---

### I

Da c'holo de, disul vintin,  
'Kleviz o kana eur *pinsin*,  
Eur *pinsin* joauz a gane,  
Enn he iez, eur zon da Zoue !

### II

Hag e lariz : « Me anave  
« Eur *PINSIN* hag a gan bemde,  
« A gan gloar Doue hep paouez  
« ..... Aboe pevar ugent blavez ! »

III

Kerkent e nijaz ma speret,  
Otro Person, 'vid ho kwelet,  
'Vit gwelet skouer ar veleien,  
Ha 'n em domma enn ho kichen !

IV

Er Skritur Doue a zifen  
'Raog ar maro meuli nepden (1).  
Neuse, 'm euz aoun, 'c'hortofomp pell  
'Raog ho meuli, beleg zantel.

V

Ha koulskoude penoz tevel ?  
Hoc'h obero a zav huel,  
'Zav huel ho moez enn hon bro,  
'Vit kana ho meulodio.

VI

Maël-Karez, Boulfriak her goar,  
Mar hoc'h euz glebiet ann douar  
Gant c'houezen ho tal, ar parko  
Zo breman leun a vokedo !

VII

Nag a zaëro hoc'h euz zec'het !  
Nag a galono frealzet !  
D'ar paour ann tamm ouz ho keno  
A goee gand ho tous komzo !

VIII

Na da bed ine ho pennoz  
A zigoraz ar baradoz !  
Ha breman e kichen Doue,  
'Vid ho zad e pedont bemde.

---

(1) Ante mortem ne laudes hominem quempiam (Eccli 11, 30)

IX

Pa deui d'ho kemer ar maro ,  
Ho taouarn na voint ket goull !  
Enn env , 'nn eur skriva he bajen ,  
Elez , e skouizaz ho pluen !

X

C'houi c'heuz zavet eunn tour huel ;  
Ha pa grosnolo ann avel ,  
Ha pa strako leun a gunnar ,  
Birviken n'hello hen diskar .

XI

C'houi ive *enn ho sa* bepret ,  
Ouz ann ifern hoc'h euz stourmet !  
Evel eunn tour , 'vel eur garrek ,  
Eo enn Iliz ar gwir velekk !!!

XII

'Barz er c'hoad don , 'vel ann derwen ,  
N'eo ket prevedek ho krizien !...  
Ho tiou skoa sonn n'int ket pleget ,  
Daoust d'ann derved paour c'heuz douget !!!

XIII

Me blij d'in zellet ho pleo gwen  
Stummet e giz eur gurunen !  
Me drid , p'ho klevan o c'hoarzin ,  
*C'houi zo zeder 'vel eur pinsin !!!*

XIV

Skrivet eo : Evel eur skeuden ,  
Bue pep hini a dremen (1) ;  
'Vel eunn neuden , hor blavezio  
A zo troc'hét gand ar maro (2).

---

(1) Dies ejus sicut umbra prætereunt. (Ps. 143, 4)

(2) Præcisa est velut a texente vita mea. (Isaïe 38, 12.)

XV

Mes ho pue 'zo eur wiad,  
'Zo eur wiaden steuet mad,  
'Ra fae euz zizal ann anko !  
.... Me gred eo tremenet ho tro !

XVI

Ar re hoc'h euz-hu eureujet  
'Boe pell amzer zo douaret ;  
Ar re a oa 'nn ho katechiz  
A zo gwevet ho iaouankiz !!!

XVII

Ar re hoc'h euz-hu badeet ,  
Tud koz breman hanter-bleget ,  
Ho baz enn ho dorn , a vale !  
.... Me lar e pedfet war ho be !

XVIII

Hon Eskop, *Breizad a galon* ,  
Gand holl veleien ar c'hanton ,  
D'hoc'h enori 'zo deud hirie !  
..... Piou 'verit mui he garante ?

XIX

War-n-hoc'h eo koeet he vennoz ,  
'Vel ar gliz war ar boked roz !  
Breman c'houi vleunio adarre ,  
Astennet dek vloaz ho pue !

XX

'Ben dek vloaz , c'houi 'gano laouen,  
Evel hirie , hoc'h offeren ;  
Ha nin holl enn dro d'hec'h bodet ,  
'Vel hirie 'laro : « *D'ho iec'het !!!* »

A. D.